



CHANSON

MARI-LOUIS



Var don : Fantic Coant



ME ho ped, Bretonnet, da lakat ho speret
da glêvet eur chanson a neve composet,
Zo grêt da zaou zen yaouanc, var don Fantic Coant,
A zo eun ton charmant evit an dud yaouanc.

Cavet meus eur sujet da ober eur chanson,
Grêt da zaou zen yaouanc n'eur garie a galon
Composet d'ar garante certen e oa entreze:
Contant e voant da vervel an eil evit eguile.

An daou zen-ma a ro d'an oll tud da velet
Ar garante barfet a dleorft da gavet,
Evel ma no ordrenet gant autrou Doue,
M'or bo ell garante an eil evit eguile.

Ne gredan ket e ve sur cavet er bed-man
Eur plac'hag a rafe evel e deus grêt houman,
A guitafe e moyen, e c'herent' hag e c'hanton
Evit mont d'ar brezel da heuill e guir mignon.

Hi a voa 'r-rouanez eus ar merc'hed yaouanc
A gomzer anezhi en pevar c'horn ar franç:
N'oa nemet eur baysantez, a zo casset d'ar palez
Zo présentet d'ar Roue ive d'ar Rouanez.

Hi zo fourdilizen an oll merc'hed yaouanc.
Coulz en e honestis vel en e c'homporsamant ;
Zo bet eis volas er brezel e servich ar Roue.
Guisquet vel eur soudart, den ne anaveye.

Hag ouspen an dra-ze, e vije o repos
Gant e brassa mignon hi a gousque bep nos,
Epad eis bloas antier eo bet gantant en arme.
Ha bep nos e gousque gantan eus e goste.

Nag a botret yaouanc a zo bet glac'aret,
E fiout er merc'hed zo n'em gave tromplet !
Pa songent bea caret, e vijent abandonnet,
E chome glac'haret hag ive chagrinet.

Houma ne deus ket grêt vel a ra ar seurt-se :
Hi e deus dalc'hed mad certen d'he c'harante,
Da YANNIC, e amoureux a gare a guir galon,
Contant oa da vervel evir e guir mignon.

Guelomb eta Mari guelomb an occasïon
A zo bei kos d'êc'h hu da guittât ho canton
N'oa nemet ar garante ho poa evit ho mignon,
Hac a voa sur gravet ebars creiz ho calon.

Pa vije an daou zen-mâ d'ar zul en ho farres,
N'éur gavent assambles da borlant allies ;
Eur garante ar vrassa a oa certen etreze ;
Vel ma cléfot er fin oa bras o amitié.

Eur desir vras ho doa, ma permettje Doue
E vijent unisset an eil gant eguile ;
Urz ar Roue empeche, ne fote nemet eis de
Pa deus as an ordrenanç da servich ar roue.
D'ar zul en oferen bret e rannas e c'halon.

Pa glêo an ordrenañ a lenne ar Persou ;
Ha c'hui glêo, emezan, cetu ama an ordrenañ
E ranqe ar soudardet evit ar Roue Franç
Ha permetet e ve eme an dud yaouane.
E ve ret din quittä eur vignonez ker coanl !
Eur vignonez a garan gant kement a garante,
Hag a rancan quittä evit mont d'an arme !

E sorti ar vored e rancontras e blac'h,
É galon chagrinet ha goal glac'haret bras.
Petra c'heus-te, emezi, me vel out chagpinet.
Allas ! va mignonez, ho quittä a vo ret ! . . .
Lennet é an ordrenañ evit ar zoudardet ;
Me garfe birvigen n'am bije ho quelet
Allon, va mignon quer eme ar plac'h neuze,
N'euz quet a zize nor e servich ar Roue,
Mar bez soudard vaillan ha non pas eur poltron,
Te vo recompancet gant ar Roue Bourbon.

Contant e ven MARI, da vont sur d'ar brescl
Penevert ma é ret, va douç, o tilezel :
Ia, me a ve contant da vervel en arme,
Me c'halfen soupçonî vec'h infidel din-me.

Me a vel va mignon, penos sur em c'hares,
Ne golli quet da boan ; me a vo da vestrez
Ne vanc quet da scrifa din pa vi en da rejimant
Ha te velo neuze qerqent va santimant,

Dalit, MARI-LOUIS, cetu eun diamant.
A zo en aour melêt, a roan dèc'h en presant.
Zo test d'ar garante e meus. va douç, evidoc'h ;
Birvigen, va mestrez, ne garin nemedoc'h

Partial'ra neuze da vont d'e rejimant,
Vardro daou vis goude e scrif d'e vestrez coant
Me a zo em rejimant contant vel eur Roue ;
Mes ho quelet, va douç, a garfen, va Doue.

Qerqent vel ma clêvas e voa er rejimant,
Hac hi monet d'e fres da quemeret arc'hant ;
Qemer a ra tri c'hant scoët, mont a ra da Bors-Louis,
Goude bea guisquet habillamant bourc'his,
Qerqent e man en hent evit mont da Naonet.
E l'ec'h ma voa YANNIC, e mignon engagé.
Pa voe ta êruet er hæer an Naonet
Comz euz ar c'habiten ractal e deus c'hoantët.
Bonjour, Autrou, amezi, a c'houi a angajfe
Eun den a zo contant da zervica'r Roue

Evel me voa guisquet e quis eun den yaouanç,
Ractal voe engagé ebars er rejimant ;
Ha tri devez goude voe laquet en faction
Dirac ar c'hordegard ma voa e guir mignon,
Neuze er saludas gant eur guir reveranç,
Evel ma a dleet da eur zoudard a Franç.
Hac er memes nosvez eus e goste e couscas,
Hep cavet nep soupçon e voa ouman eur plac'h.

Guelit ar garante euz an daou zen yaouanç ;
Epad eiz vlas antier m'int bet er rejimant,
Biscoas essur na zouetas e voa ouman e vestrez,
H'ac e vije bemnos cousquet eus e gostez.

Poe êru an amzer d'a gavet e c'honje,
Hac hi mont da gavet e c'habiten eun de :

Cetu echu va amzer, Autrou roit din va c'honje,
Evit ma zin d'ar guêr goude servich ar Roue
Me a c'houlen ouzoc'h c'hoas eur zoudard yaouank
Zo êchu e amzer ebars ho rejimant.
Zo va c'hamarad guele a garan a wir galon,
Evit ma imp hon daou assambles d'ar c'hanton.
Neuze-ta ar c'habiten a zinas daou gonje,
Evit distrei d'o pro goude servicha'r Roue.
Evel ma yent gant an hent, hi a gane goal gyê :
Allon, ni zo tost d'hor bro, va douç, va c'harente.

Pa voent êru tost d'ar bourg, quent entren en o
]c'hær,

Hac hi da lavarat neuze d'e zervicher :

Ne c'heus-te quet er vro-man, emei, eur vestrez
[coant,

A behini e comzes pa voa er rejimant ?

Allas ! eo-da, emean, n'eur s'jêi var e galon,
Me meus sur er vro-man, va doucic MARION.
Zo caus on glac'haret oll aboe m'on angaget ;
Tremenet ê an eiz vlaz ne meus-i qet gulet,

Te a lavar gaou, emei ; sell ervat ouzon-me :
Me a zo MARI-LOUIS. da zouç da garante,
A zo bet epad eiz vlaz eus da heuil en arme,
Ac a zo bet bemnos cousquet eus da goste.

Ha te vel, va mignon, aman an diamant
A poa-de roet din qet mont d'ar rejimant ?
A voa test d'ar garante a lares poa evidon-me
Gulet ec'h eus certen meus evidout ive.

Perac eta MARI, pa voas er rejimant

E lezes va c'halon en glac'har, en tourmant ?
Rac me meus da garet certen dre guir garante,
Mes mui a caran c'hoas sur an Autrou Doue.

Allon-ta, va mignon, demb da di ar Person,
Ha me a ya breman da gonta va rêson :
Va c'hentel ze studiet, me en laquai estonet,
Marteze biscoas plac'hn'endeus-an bet spontet.

Allon, Autrou Person, eme MARI-LOUIS,
Hastit en em guempen da vonet d'an ilis :
Ni zo daou zoudard yaouanc o tolt eus an arme,
Ha c'houi renq dimezi an eil gant eguile.


Ha ! ha ! eme'r Person, cetu eur c'hoari sot ;
Biscoas n'em bea clêvet e ve demeeet daou bot.
Nan, nan, eme'r Person, me scrifo d'an Escop
Qent ma vent obliget da eureji daou bot.

Dalit, Autrou'r Person, cetu daou gonje mat.
Brema me ya d'ar guer evit chench va dillat :
Ni z'on daou eus a baros, me a zo MARI-LOUIS,
Zo ganet er bourg-man, badeet en oc'h ilis.

Ah ! ia eme'r Person, me voar biou out brema ;
Me rayo da eured, ne gonsto dit netra ;
Me a scrifo d'ar Roue eyidout, MARI-LOUIS,
Ha te po an enor da vonet da Paris.

Pa voent bet demeeet, e scrifas da Paris,
Ar Roue a c'houlen cass dean MARI-LOUIS :
Ne nemet eur paysantez, mes mont a ra d'ar palez
Presantet d'ar Roue coulz ha d'ar Rouanez.

Ha pa voe dirazan e presant e c'honje :
la, Sir, emezi, me zo bet en arme ;
Gout a ran an exerciç ha mania ar zabren,
Ha laquat da dehel meur a Iversourien.
Ar Roue mad neuze neus-hi recompancet,
Vel eur zoudard vaillant en devoa meritet,
Rac-se, merc'het yaouanc reдит oll d'an arme.
Hac ho po recompanç ive gant ar Roue. *Fin*



SON
HERRI PEVAR
ROUE FRANC

Var an ér gallec

NA pebes Roue
Eo bet Herry gæchat !
Coulz a ell bale ;
Mes nicun en tu all
Ne vezo guelet
En Franç nac e lec'h all,
Ar Roue Herri
A voa eur pot dious-tu,
A garrie hardi
A garrie hardi
E JANNED ha guin ru,
Hac o combatti
A vouie cregu dru.

E creis ar gombat
E comzas evellen :
Dalc'hit ho lagad
Var va flumachen ven
Sur eo d'a lakat
Bepred er guir rouden
Herri a garric
An dud divar ar mèz,
Hac a rekete
M'o dije bep sulvez
Yer er pot dèze
Da zèbri en o èz.
Herri pèvare
N'en deo ket maro hoas,
Rac e vugale
E ligne hac e raç
Zo leun a vue :
Graç deo da chom hiel bloas,
Mar distro bikeu
An diaoul da c'hoari vas,
Guest omb da zouten
Ar Roue en e blaç,
Ha prest ha laouen
Da rei peb a dol bas.

FIN